

CANTIK

EVIT

FIN EUR MISSION PE RETRED

Achu eo ar mission (retred), kent kuitât, va Doue,
Ez eo just e rentfemp graçou d'ho majeste :
Mil bennoz d'ehoc'h, ô Jesus, hon c'halonou chenchet,
En em ro d'ehoc'h a nevez, var-n-omp-ni oll renet.

Ra vo an oll bec'hejou a viskoaz commettet
Gant eur c'heuz beo ha c'huero da viken effacet :
Diwal ne deufe Satan, enebour hon ene,
D'hon diskar ha da ober d'eomp gouliou neve.

'Vel eur leon furiuz e ra an dro d'eomp-ni,
O clask eur re bennaket evit ho devori :
Diwallit ho pugale, ô Tad celestiel,
Ha lakit-he en goare dindan ho tiou-askell.

Ah ! pegouls e scleraio an devez bennighet,
E pehini an eol na iell mui da gousket !
Ah ! pegouls ec'h arrufomp en env, a zo hon bro,
E pehini na brezel nag enebour na vo !

Rentomp gloar ha meuleudi oll d'an Tad Eternel,
Da Jesus, he Vab unik, ha d'ar Spered-Santel,
Pere a zo tri Ferson en eun Doue hepken,
Rentomp gloar ha meuleudi d'ezho da virviken !

Vu pour être publié :

19 Mai 1891.

F. OLLIVIER, s. s., v. g. h.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.

